

Ar paour kêz Lanig

60



-1-

Me zo eur paour kêz den a-ziwar ar bed-ma,
 A zo en eur harlu e-touez ar re wasa.
 Tostait tud yaouank ha deoc'h me ziskouezo
 An hent kalet am eus kerzet warnañ eto.

-2-

Tremenet eo an deiz, setu kouezet serr-noz,
 Hag a-benn ma vo pell teuy an dud da renoz,
 Ha me, paour kêz Lanig, e kornig va jardin,
 N'ouzon petra ober pe gouela pe c'hoarzin.

-3-

Me glev an eostig-kuz gant e vouez alaouret,
 Zo staget da gana barz ar c'hoajou kuzet,
 Hag ar merc'hed yaouank ivez 'n em zedera,
 Tra la la, la la la, tri-dra, tri-dra, tra-la.

Dastumet gant GUILLERM

Kendoniet gant Paul LE FLEMM

Me zo eur paour kez den a zi-lwar ar bed-ma
 A zo en eun har-lu e touez ar re wasa
 Tos-to-it tud yaou-ank Ha deoc'h me ziskouezo
 An hent ka-let am eus ker zet war-nan a-ta